



# GUERZ

69  
279

*Var sujet eun Den Yaouanq a voa deut da baea pêvar scoêt goude e varo.*

Speret-Santel, m'o ped, anflamit va speret,  
Da gana eur c'hantic evit ar Vretonet,  
Var sujet eun exemple trist pehini zo éruet  
Ebars en Breiz-Izel, e mis Du tremenet.

Crena ra va c'halon ive va oll memprou,  
Va daoulagat ne reont nemet scuilla daelou,  
O tont da gonsideri peguer trist è ar matier :  
Goulen a rân sicour eus ar Verc'hes santel.

Eun den yaouane, sivoas, voa n'em abandonnet,  
Goude ma voe maro e dud gant ar c'hlenned,  
A voa n'em abandonet da bep seurt tristidiguez,  
Da bep tristidiguez, da bep eurt paourenteuz.

Evel ma voa yaouane, ne grede clasq netra ;  
Tud vad, dre charite, a gass tamou dezà ;  
Hac evel ma oa yaocane e teujot d'er scandalat  
Pa na gare sevel ha mont da labourat.

Souffr a ra mil injur gand güir baciantet,  
O laqat e fianc er Verc'hes biniguet,  
Dre m'en devoa e imach hac hini ar Bassion,  
Ha ma rë diraze bemdez e oréson.

Un den eus ar c'ontre, un den eus ar c'hartier  
A deuas d'e velet, o clèvet e vizer,  
En eur lara déan : deus d'am zi da labourat,  
Ar c'bès a respontas : ne meus qet a zillad.

Gouzout a rân certen labourat an douar ;  
Mes allas ! em'er paour, ne meus na pal na mar :  
Pêvar scoêt a vancfe din evit en em eqipa.  
Me a yelo d'ho ti sur evit ho paea.

An ozac'h var ar guer a ro pêvar scoêt,  
O lavarat déan : Va mignon, ne vanq qet,  
En eur lavaret déan : deus d'am zi da labourat  
Pa po bet pal ha mar ha prenet da zillad.

Monet a ra d'e di, ma voe eur pennad ;  
Plijont a rë deze certen da labourat ;  
Un deveze dreis ar re all e voe meurbet estonet  
O sonjâl paour-qèz pelec'h e voa chomet.  
Ma ejont ta da velet, hac e voe cavel maro  
Ebars en e lochic, var eun darnad colo.

Lienet voe è gorf vit bea antérêt ;  
Ar brud a zavas prest, ma teujot d'e velet,  
An den-mân' deuas ive evel m'oas eus ar c'hanton,  
A deuas d'e velet... O Doue pez eston !

Pa zorti eus an ti, d'an oll e lavare :  
Orato bivigen e ene ne antre  
E Barados un Doue, qen en devezo paeet  
A pez a rois déan n'eus qet pell pêvar scoet.

Dre ar c'homzou terrupl pere a brononças,  
N'oun penos an douar d'e longâ ne zigoras,  
Oc'h arrêt eun ene a voa e vont d'ar joayou,  
Ar vije recevet gant Jesus en eïvou.

Ar Verc'hes biniguet, dre ma voe dëi fidet,  
A accord eur mennad evit he zervicher,  
Ma teuje var an douar eun instant da labourat,  
Evit monet d'an ti da baea ar barbar.

Monet a ra d'e di, ha ma voa recevet  
Goulen a ra labour, ma voe déan roet ;  
Labourat a ra er parq qement hac an tri güella,  
Ar pez zo estonus, hep débri nac eva.

Pa zeu coulz ar repos, caer e vije 'r pedi  
Evit monet gante assamblez dâ zébri,  
En em denne a geste, hac eno var e c'hiniou  
En em strinq d'an daoulin evit souffr e boaniou.

Dont a ra 'n uzuiller, qemer a ra eston,  
Hac èn monet ractal da laret d'ar Person  
En devoa eul labourer hac a rë qément a tri,  
Ar pez zo estonus, hep eva na débri.

Mâ, eme ar Person, cuntinuit bepret ;  
Bremâ zouden valant me yelo d'e velet,  
Mes pa éruas er parq, dre bermission Doue,  
Ec'h anaveas pront penos voa eun ene.

Me coajur, eme 'r Person lavardia me a ped  
Né qet hirio eis de em boa da antérêt ?  
Petric a zefot dide ? Petric a glasques amâ !  
Petric a zefot did evit da zelivra ?

Pêvar scoêt am boa bet digant mestr an ti-mâ,  
On deut dre vouir voyen sur euit o faez :  
Oh ! e leac'h pêvar scoet, eiz certen a vo roet,  
Eur veach, ene paour, qen a vi delivret.

Ne meus qet ar pouvoar da entre ar joayou,  
Nemet gant va Æl-mat a cléfen ar c'hélou  
Pedit Doue evidon, me a ya prest d'an évou :  
Varc'hoas d'ar memes heur me rento ar c'hélou.

Dont a ra ar Person da zigass an arc'hant,  
Ma vije delivret a boan hac a dourmant,  
Mes me, eme an ene, am boa int bet digantan :  
P'oc'h eus ar vadelez, me o rento déan.

Pa astennas e zorn da guemer an arc'hant,  
E santas an ardoar, ar boan hac an tourmant ;  
E vrec'h deo betec e scoa en instant a voe dëvet,  
An arc'hant eus e zorn d'an douar zo quête,  
Adieu, Autrou Person, me ya bremâ d'ar joayou,  
Me bedo evidoc'h Jesus-Christ, hon Autrou.

Pa dleo un den dëc'h, pa yel eus ar bed-mâ,  
Elec'h desirout drouc, pedit Doue gantâ :  
Pedomp bepret ha meulomp ma zayo da repos,  
Ha da veuli Doue en gloar ar Barados.